

▶ PELEC'H-PEGOULZ ?

Dalc'het e vo Skol-Hañv 2015 KEAV
e Kastellin e lise ar Stêr Aon
(lise labour-douar ha liorzhouriezh).

Div sizhuniad studi ha dudi a vo kinniget :

- > Prantad 1añ (5-11/07/15)
- > Eil prantad (12-18/07/15).

Eus ar Sul da noz
betek ar Sadorn, goude pred kreisteiz

E-pad an div sizhun-se
e vo degemeret ar vugale 6-14 vloaz
gant ur skipailh buhezourien en un « alsh ».

▶ PEGEMENT ?

(Ar prizioù a zo evit ar c'hentelioù, ar boued
hag al lojeiz)

Priz ur sizhuniad staj : 270 €
Studierien amzer-leun ha tud dilabour : 230 €

Ret eo paeñ an hanter a-raok ar staj
kas ar chekenn gant ar folenn-enskrivañ
da g-KEAV.

Un niverenn stummadur dibaouez
a zo gant KEAV

KAMP ETREKELTIEK AR VREZHONEGERION

Skol-hañv KEAV a zo anezhi ur bodad tud laouen
oc'h en em gavout asambles evit klevet ha komz
brezhoneg a-hed an devezh hag e-pad ur sizhun, pe
ziv ; bevañ e brezhoneg ha reiñ tro d'an deskarded
da zeskiñ ar yezh o soubañ er brezhoneg a-hed an
amzer.

Anez gouzout diazezoù kentañ ar brezhoneg (ur
bloavezh studi pe zaou) n'hall ket staj KEAV dougen
frouezh deoc'h. D'an deraouidi e tegasomp soñj e vez
aozet stajoù evite er memes mare.

Degemeret e vez bugale gant o zud en ul ALSH
(Accueil Loisirs Sans Hébergement).

KEAV zo ezel eus Kuzul ar Brezhoneg.

Kentañ ha diwezhañ evezhiadenn e galleg

Le stage d'été de KEAV, c'est plus d'une
centaine de personnes heureuses de se
rencontrer pour entendre et parler breton.
Pour chacun, le faire, c'est un choix, un plaisir :
pour respecter cette volonté commune,
chacun s'efforce de s'exprimer uniquement en
breton. Cet effort est également un élément
indispensable de l'apprentissage. Le stage de
KEAV est connu pour cela. En s'inscrivant, chacun
est donc conscient de l'engagement auquel il souscrit.

LE BRETON EST LA SEULE LANGUE UTILISÉE PAR TOUS AU COURS DU STAGE.

Le stage ne peut profiter véritablement qu'aux personnes
ayant des bases élémentaires suffisantes du breton.
Nous rappelons qu'il existe des stages pour débutants à
la même période.

KEAV



22 hent Moulouen 29000 KEMPER

Pgz : 02 98 95 59 31

Postel : keav@wanadoo.fr

Lec'hienn : <http://www.keav.org>



Graferezh : Olwenn Manach / www.olwenn-manach.com



Skol HANV

Mont war-raok
Bevañ e brezhoneg

2015

KASTELLIN
5-11 a viz Gouere
12-18 a viz Gouere

Kamp Etrekeltiek ar Vrezhonegerion

PETRA VO GRAET ER C'HAMP ?

(Eus 9e da 12e hag eus 2e da 5e)

E pep hini eus an div sizhun ho po da zibab etre :

Ar c'hentelioù war ar brezhoneg

Studiañ ar brezhoneg e kentelioù aozet a strolladoù bihan a vo kinniget. Pemp strollad a vo. An dud ne gomprenont ket pe ne gaozeont ket aezet-tre a zo o flas en unan eus ar strolladoù 1, 2 ha 3 ; ar re uheloc'h o live a vo en o bleud er strolladoù 4 ha 5. Dre destenoù pe c'hoarioù e vez studiet ar brezhoneg, ar c'heriaoueg, ar yezhadur, hag an distagadur diouzh doare pep kelenner. Lakat ar stajidi da gaozeal e mod pe vod, diouzh o live, eo ar pal.

Ar rummadoù war un danvez

Ar re a oar komz ha skrivañ mat brezhoneg a c'hall bezañ en ur rummad kentelioù evit pleustriñ war un danvez. N'eo ket un « dra da zibab » evit ar re a heulio ar c'hentelioù war ar brezhoneg. A-hed an devezh e vo labouret war an danvez dibabet hag e-pad ar sizhun. Dibab un danvez a ranker ober hag unan nemetken.

Displegadenoù war an doare d'ober skol vrezhoneg a vo ouzhpenn ar c'hentelioù-se evit an danvez skolaerien/kelennerien.

E-maez ar c'hentelioù, evit an holl :


Da greisteiz ½ : kan (ha dañs hervez an animatour)
Goude 5 eur (hervez an deizioù) : pourmennadennoù, c'hoarioù, mont da welet tud eus ar vro, ober sport, kemer perzh e kaozeadennoù, stalioù labour a bep seurt, sellet ouzh filmoù...

Ar vugale a zo etre 6 ha 14 vloaz a vo degemeret bemdeiz en ur greizenn dudiañ eus 9 eur vintin da 5 eur enderv.

AR SIZHUN GENTAÑ

Ar c'hentelioù war ar brezhoneg

Ar stajidi, lodnetet diouzh o live etre pemp strollad, a gaozeo hag a studio brezhoneg e kentelioù un eur ha kart, un eur a-wechoù, gant daou gelenner d'an nebeutañ.



Ar rummadoù war un danvez

C'hwec'h rummad kentelioù war bep a zanvez a vo evit d'an dud a oar kaozeal ha skrivañ mat brezhoneg pleustriñ war un danvez a blij dezhe. Setu amañ an temoù :



Hervez niver an dud enskrivet, pe abalamour d'un dra dic'hortoz, e c'hell unan bennak eus ar rummadoù bezañ lamet kuit eus ar program.


Titouroù, program ar rummad-mañ-rummad, a gavoc'h war hol lec'hienn. Kaset e vo ar program deoc'h ma c'houlennit.

Peder pe bemp displegadenn war an doare da gelenn a vo bep sizhun evit an danvez skolaerien/kelennerien.

AN EIL SIZHUN

Ar c'hentelioù war ar brezhoneg

Pemp strollad a vo ivez evit d'ar stajidi kaozeal ha studial brezhoneg e kentelioù un eur ha kart, pe un eur, gant daou gelenner d'an nebeutañ.



Ar rummadoù war un danvez

Rummadoù a vo kinniget d'an dud a oar kaozeal ha skrivañ mat brezhoneg evit reiñ an tu dezhe da bleustriñ a-hed ar sizhun war un danvez hag a blij dezhe. Setu an temoù, an danveziou :

